

pare actuellement un autre livre "Géographie de la Bretagne". Tout ceci écrit dans un esprit militant,

contestataire. Par ailleurs A. F. essaye d'ouvrir, à l'occasion de combats ponctuels, tous les gens intéressés par la culture bretonne, d'expression française ou bretonne.

C'est ainsi qu'A. F. organise depuis 3 ans avec B.Y.V et S.A.E. la fête du breton (Gouel ar Brezhoneg) ; elle participe aussi à toutes les manifestations populaires, contre les centrales nucléaires, les camps militaires (Ty-Vougeret), pour le travail en Bretagne, etc ...

Elle regroupe des membres des partis politiques aussi bien que des inorganisés. Sa vocation est d'être un carrefour pour tous les Bretons de gauche qui veulent promouvoir la culture populaire, et ceci sans exclusive aucune.

A. F. n'est pas une association ayant des idées politiques.

Q. Lorsque la gauche sera au pouvoir, on peut espérer plus de libertés pour la langue bretonne et les autres langues de France. Aujourd'hui déjà les organisations de masse soutiennent les revendications culturelles, notamment

grioculture en Bretagne" o galleg, med gand eur spered-stourm, gand eur spered kontestataer ; hag emañ o sevel breman ive eul leor all "Géographie de la Bretagne", ive gand eur spered digor-tre ha stourmuz-tre, ha n'eo ked "integred" kenneubeud. Bon, eveljust ze zo labour-embann dreist-holl ; med ze zo d'ober i'eo.

A-hend-all neuze a poagn A. F. da lakead an holl dud hag a zo dedenned, interesed gand ar hultur pobleg-breizeg ha pobleg war eun dro - galleg pe vrezoneg, da lakead an'e d'en em voda assemblez ha da gemer perz e stourmou "digou eziel" (ponktuel).

Bez eo bed evelse saved gand AR 'FALZ teir gwech dija GOUEL AR BREZHONEG, assemblez gand BREZHONEG YEZH VEW ha SKOL AN EMSAV. Gwechall pe oa GALV e oa A. F. e-barz GALV. Pa vez greed manifestadegou, pe a-eneb da Di-Vougered, pe a-eneb d'ar hreizennou nukleel, e vez AR 'FALZ e-barz, assemblez gand reou all. Pa vez manifestadegou evid ar labour e Breiz, evid ar skoliou, evid ar brezoneg ive, e vez A. F. e-barz. Beteg-henn eveljust n'eus kod bed greed A. F. traou ane'ti heh-unan ; gand reou all 'deus bed greed ; med komzed vez muioc'h-mui deuz A. F. pegwir eo doue da ve'eo eun dra beo, hag a ya en-dro, hag a zo tud 'barz, tud yaouank, tud deuz kemend strollad politikel zo, pe tud n'emaint kod e'hoaz barz eur strollad politikel, pe ne fot ked de'eo mond barz strolladou politikel. Setu ez eo A. F. eur gwir kroazhent evid ar Vretoned deuz an tu kleiz hag a zo o klask mond war-raog, heb skarza den 'bed. N'eo ked eur strollad gand mennoziou politikel.

G. Pa vo an tu kleiz barz ar gouarnamant, emichañs e vo gwelloc'h an traou evid pezh e zell gwiriou ar yezou deuz ar Frañs. Med eun dra all vo, 'gav deom, ober bemde gand ar brezoneg. Kalz stourmou a zo e Breiz, 'vid implij ar brezoneg er skoliou, er vuhez publik, hag all, ha toud ar strolladou "yohel" (de masse) a zo a-du gand ar goulennou-se ; med ne reont ked kalz, d'hor soñj, da skwer vid implij ar brezoneg